

Sant Roc'h (Plounevez-Kintin) / Saint Roch (Plounévez-Quintin)



Diskan :

**O sant Roc'h, diwar ho menez
Binnigít parrez Plounevez :
Mirit hon c'horf diouzh ar c'hleñved
Hag hon ene diouzh ar pec'hed.**

Refrain :

**Ô saint Roch, de votre colline
Bénissez la paroisse de Plounévez :
Protégez nos corps de la maladie
Et nos âmes du péché.**

1 – Gant ar vosenn 'voe taget ;
An holl ganti 'veze tapet.
Ar spont war ar vro a rene ;
'Oa den ebet ha ne grene.

*Il fut atteint par la peste ;
Tous en étaient atteints.
La frayeur régnait sur le pays ;
Il n'était personne qui ne tremblât.*

2 – Sant Roc'h gant Doue dibabet
Eno burzhudoù 'n 'eus hadet,
D'ar paour-kaezh korfoù 'oa brevet
Sant Roc'h a roe ar yec'hed.

*Saint Roch choisi par Dieu
Sema là-bas des miracles,
Aux pauvres corps qui étaient exténués
Saint Roch donnait la santé.*

3 – Brud e ano a-dreuz d'ar bed
Seizh kant vloaz 'zo bremañ a red,
Degaset dimp gant sent ar vro :
Sant Roc'h 'zo brudet tro-war-dro.

*La réputation de son nom à travers le monde
Court depuis sept cents ans,
Venue jusqu'à nous par les saints du pays :
Saint Roch est célèbre aux alentours.*

4 – Hon zadoù amañ 'deus savet
 Ur chapel 'zo ganimp karet :
 Chapel sant Roc'h 'us d'an draonienn
 A bar 'vel ur c'houlouenn.

*Nos pères ont ici bâti
 Une chapelle que nous aimons :
 La chapelle de saint Roch dominant la vallée
 Brille comme une chandelle.*

5 – En hañv, 'tousesk ar brug, ar balan,
 'Pad ar gouañv 'tousez ar bleuñv-lann,
 War ar yeot glas e pep mare
 Tro d'ho chapel eo brao bale.

*L'été, parmi les bruyères, les genêts,
 L'hiver parmi les fleurs d'ajonc,
 Dans l'herbe verte en toute période
 Il fait bon se promener autour de votre chapelle.*

6 – Met daoust pegen kaer an dachenn
 Gant bokedoù 'kreiz ar c'hlazenn,
 E-touez ar bleuniou 'vez amañ,
 Chapel sant Roc'h eo ar goantañ.

*Mais si belle que soit la place
 Avec des bouquets au milieu du gazon,
 Parmi les fleurs qui se trouvent ici
 La chapelle de saint Roch est la plus jolie.*

7 – Amañ a remzi da remzi
 Plounenez 'zo bet o pediñ ;
 Ur wech ouzhpenn ho pugale
 A zeu d'ho pediñ adarre.

*Ici de génération en génération
 Plounévez est venue prier ;
 Une fois de plus vos enfants
 Viennent vous prier encore.*

8 – 'Vit ho pediñ, yaouank ha kozh
 Hon eus krapet war-lein ar roz ;
 Ouzhimp ne chomit ket bouzar,
 C'hwi 'oa ken mat war an douar.

*Pour vous prier, jeunes et vieux
 Nous avons gravi le tertre ;
 Ne soyez pas sourd à notre égard,
 Vous qui étiez si bon sur terre.*

9 – Yac'hait hon zud, hon loened,
 Mar vent skoet gant ar c'hleñved.
 Evidomp holl pedit Doue
 Hag e vefomp dinec'h goude.

*Guérissez nos gens, nos bêtes,
 S'ils sont frappés par la maladie.
 Pour nous tous priez Dieu
 Et nous serons rassurés.*

10 – Sant Roc'h, pa zeuas 'barzh ar bed
 Ha 'pad e vuhez hed-ha-hed,
 Sant Roc'h war e gorf a zouge
 Ur groaz ruz moulet gant Doue.

*Saint Roch, quand il vint au monde,
 Et sa vie durant,
 Saint Roch sur son corps portait
 Une croix rouge imprimée par Dieu.*

11 – War-lerc'h sant Roc'h kerzhomp hirie
 Ha dougomp ur groaz ni ivez ;
 En ur ziskenn gant an dachenn
 Kemeromp pep a groaz raden.

*Marchons aujourd'hui à la suite de saint Roch
 Et portons une croix nous aussi ;
 En descendant de cet endroit
 Prenons chacun une croix de fougère.*

12 – 'Trezek ar feunteun vinniget
 Dimp gant sant Roc'h bet kinniget,
 Kerzhomp en ur c'houlenn pardon,
 Dougomp hor c'hroaz a wir galon.

*Jusqu'à la fontaine bénie
 Qui nous fut offerte par saint Roch,
 Marchons en demandant pardon,
 Portons notre croix de bon cœur.*

13 – War ar Groaz Jezuz 'zo staget,
 E dreid hag e zaouarn tachet.
 Ar Groaz a zo ruz gant e wad
 Evit paeañ hon dle d'an Tad.

*Sur la Croix Jésus est attaché,
 Ses pieds et ses mains cloués.
 La Croix est rouge de son sang
 Pour payer au Père notre dette.*

14 – Dre ar Groaz ec'h omp bet prenet,
 Drezi ec'h omp bet badeziet,
 Gant ar Groaz e vevomp noz-deiz,
 Ar Groaz a zo banniel hon feiz.

*C'est par la Croix que nous sommes sauvés,
 Par elle nous avons été baptisés,
 Nous vivons nuit et jour avec la Croix,
 La Croix est la bannière de notre foi.*

15 – Ar Groaz plantet 'hed an hentoù
 A ziskoez dimp hent an Neñvoù.
 En ur dremen en he c'hichen,
 N'ankouaomp ket sin ar c'hristen.

*La Croix plantée au long de nos chemins
 Nous montre le chemin du Ciel.
 Quand nous passons près d'elle,
 N'oublions pas le signe du chrétien.*

16 – War an tour ar Groaz 'lar dalc'hmat :
 D'an Neñv savit ho taoulagad.
 Ne bigner d'ar gêr ziwezhañ
 Nemet dre ar Groaz er bed-mañ.

*Sur la tour la Croix dit toujours :
 Au Ciel levez les yeux.
 On ne monte à la dernière demeure
 Que par la Croix dans ce monde.*

17 – Ar bez war an Anaon serret
 E douar santel ar vered
 Gant ar Groaz a vez goudoret
 Ha ganti e vo digoret.

*La tombe refermée sur les Trépassés
 Dans la terre sainte du cimetière
 Est protégée par la Croix
 Et c'est par elle qu'elle sera ouverte.*

18 – Dre ar Groaz e vefomp barnet,
 Ha mar n'hon eus ket he nac'het
 Jezuz hon degemero mat
 Er Baradoz e ti e Dad.

*C'est par la Croix que nous serons jugés,
 Et si nous ne l'avons pas reniée
 Jésus nous accueillera bien
 Au Paradis chez son Père.*

19 – 'Tal ar feunteun plantomp hon C'hroaz
 Ha da vloaz ni a zeuio c'hoazh ;
 War-lerc'h sant Roc'h en ur ganañ
 'Bep bloaz ni a zeuio amañ.

*Près de la fontaine plantons notre Croix
 Et dans un an nous reviendrons ;
 À la suite de saint Roch en chantant
 Nous viendrons ici chaque année.*

20 – Kenavo, sant Roc'h, kenavo !
 Ha da viken ni a gano
 Ho madelezh 'vit Plounevez,
 Eus ho chapel war ar menez.

*Au revoir, saint Roc'h, au revoir !
 Et à jamais nous chanterons
 Votre bonté à l'égard de Plounévez,
 Depuis votre chapelle sur la colline.*

A. Thoz, kure / A. Thoz, vicaire.